

## — 31 —

**H**or c'halonou memes a rente oll kontant.  
**R**ac e hini e-unan a zo pareillamant guyé,  
**E**vel ma ve an deillou er gues en fin mis maé :  
**M**emes ken a sônc'h din an devez a hirie,  
**E** devens astennet deg bloavez eus va bue.  
**G**raç decomp d'en em velet en palez celestiel :  
**E**n hano an Tad ar Mab, hac ar Speret-Santel.  
**E**no gant an Æl-Mad ni vo représentet,  
**P**a vo ret renta kont dirag Zalver ar bed ;  
**E** vo lennet an decret, hep hor favorisàn ;  
**D**eineus ho meritou e vo barnet pep-unan.

**M**ar e meus choquet den dre re a liberte,  
**E**c'houlennan mil eckus digant ho majeste ;  
**B**et e meus ho kônje gant ho permission,  
**M**e ho trugareca deus a greis va c'halon,  
**M**'ho ped d'am asista evit e c'hondui  
**M**a zefont gant enor d'e c'hass da eureuji.

*Rimou evit gouten ha rei Plac'het da eureuji*  
**O**rsus eta, compagnuez,  
**E**n em retirit oll a gostez.  
**E**vit m'am be an avantaj da barlant  
**A**man, en ho présenç, an langach clokant.  
**N**e ouffen ket certen ober eur guelloc'h tra  
**E**guet dont da ober Sin ar Groas da guenta.

*In nomine Patris et Filii*  
*Et Spiritus Sancti.*

**H**a neuze e lavarant *Amen*  
**E**vit êchui ervad va feden.

**D**ebonjour ha joa eu ty-màn :  
**N**'en dêo qet . . . . . a chom amàn ?  
**I**a, va mignon, eun action vad oc'h eus grêt,  
**D**re Sin ar Groas pas zoc'h commencet :  
**M**e a rayo ive coulz a c'houi  
*In nomine Patris, et Filii,*  
**B**ac evit êchui ervad va feden,  
*Et Spiritus Sancti, Amén.*

## — 32 —

*Presenti ar rēr eur Vreg*

**Cetu aman eur plac'h yaouank**  
**Hac e deus eur speret kontant,**  
**A zo diangach a bep lec'h.**  
**Ha ma na dēo ket mad d'ho keut,**  
**Certen ec'h ellit mont en ho rout.**

**Ne douetān va mignon koant,**  
**E ve ho ty ken dibourve eus ar blac'het yaouank.**  
**Na zisgasfac'h dəmp unan da velet,**  
**Certenamant ne vezoz ked refused.**  
**Mes houmān a zo an daill var e beg**  
**Da vezà êt pell-zo d'ar vicher eus ar vreg.**  
**Me vel merket var e c'had clēi.**  
**E zeus bet goas o paquet dēi**  
**Kassit-hit buan var e guis,**  
**Gant aoun e defe droug avis.**

**Klêvet oc'h eus alies parlant.**  
**O homz deuz eur zal kaer ha brillant :**  
**Ia, va mignon, me meus eur sal.**  
**Hac a zo oll carget demeus a drouleal :**  
**A bep-tu demeul an daou gostez,**  
**Nø zeus nemet akajou hac olifes,**  
**Ha dindan an treid, evit servicha da bave ;**  
**Ia, ar zall gaer-mâ zo dre oll dekoret**  
**Demeus ar beder blanten guera a ve kavet :**  
**Unan a zêo ar roz, eun all tulipes,**  
**Eun all ar palm superb, hac eun all ar cypres.**  
**Ha c'hoas ne meus kontet dēc'h netra**  
**Evel e zàn da gonta dēc'h brêmâ :**  
**En creiz ar zal-mân e zeus eur femelen**  
**Demeus ar re gaëra e veljot birviken ;**  
**E muzellou a zo demeus ar roz bordet ;**  
**Michanç e zês ounes o fell dēc'h do gavet,**  
**Va mignon, gouzout a rit ervad**

## — 33 —

Pâ gaver an avel eo a ranker guentat ;  
 Ha c'houi, pa gafet diskarg d'ho merc'het  
 Me ho ped, mignonet, n'ho refusit ket,  
 Ha c'hoas trugarekaît Doue,  
 Pa na reomp en guis Table,  
 En devoa da ravissa ar merc'het :  
 An devez inemes demêus ho eured.

Cetu aman eur plac'h iaouank,  
 Zo ker kaer hag an eol brillant  
 E diou chod a zo ruz evel ar rôs,  
 Distinguët evel an deiz dious an noz,  
 E zal a zo ker kaer hag ar c'hristal ;  
 Lakat a ra kalon mab da dridal :  
 Ha ma na blij ket houman d'êc'h, |  
 Na ouffen ket petra da ober d'êc'h,

Troublet meurbet eo va speret.  
 Pe eur banne re am beus evet,  
 M'ar deo hounnes ar femelen,  
 A meus gret anezhi ar goulen ;  
 Mes ar plac'h-se, pa zeo deuet,  
 Ne deo ket da veza refuset,  
 Me a zo ive eun den iaouank,  
 Hag e meus eur speret kontant,  
 Hag a zo diangaj en peb leac'h  
 Hag a dalvez hirio koulz ha d'êc'h.

A lakaïo va dorn en he hini,  
 Hag a ielo gant-hi da zimezi ;  
 A ralo out-hi peb kontrad mad,  
 E vel a eure e mam d'he zad ;  
 A bremetto dezhi fidelite ha fe  
 E keit ma vezin en bue :  
 A zalc'ho mad dêi beteg mervel :  
 Ne ouffen ket lavarat guell.

Arça eta, va mignon kez,  
 Cedi a ran ganec'h ar plac'h nevez ;  
 Mont a ran d'he digass d'eoc'h d'an nor :

## — 34 —

Me o ped d'he receo gant henor  
 Disdostaît eta, den nevez,  
 Da guemer en dorn ho mestrez ;  
 Evit rîi d'eoc'h an arvoenti,  
 Lakit ho torn en he hini,  
 Ha sonjit penos e pado,  
 Mo komanant beteg ar maro.  
 Va deut ket d'he goaldrêti, d'he chaseal eus an ty,  
 Evel pa ne anevafac'h ket anezhi :  
 Pe m'er grit, va mignon, selaouit mad eur guer :  
 Tec'hit ervad eves demeus ar goalinier,  
 Ar goalinier a zorn Doue oll-buissant  
 A bunisso ar re vechant ;  
 Da lavaret eo ar goalinier  
 Demeus he fulor hag he goler,  
 Pere a c'hellomp da evita,  
 O veva en graç Doue er bed-ma,  
 Pedi Doue, roue an Tron,  
 Da rîy deoc'h holl e venediction,  
 Ha da assista en hoc'heured hirle,  
 Evel ma reas guechal en eured Cana, en Galilée,  
 Tachit eta da gundai eur vuez vad,  
 Hervez Doue hag hervez ho stad,  
 Evit ma c'hefot gantan da repos  
 En fin ho puez en gloar Doue d'ar Barados.

Me a ya da lakat va zok var va fenn,  
 Evel a dle ober peb christen,  
 Compagninez, gant ho permission,  
 Pa meus grêt va dever ha va c'homission.

## DISCOURS

*Da lavaret e-kichen an ty da eur Goulen*

Salud, tud ag enor, gant peb somission :  
 Tud eus a bep kalite hag a bep kondition ;  
 Ho ty, ho inadou hag ho domes tiket